



FORMULAIRE
DU
PRONE EN BRETON


POUR LES DOYENNÉS

de Faouët et Gourin

FORMULAIRE
DU
PRONE EN BRETON

POUR LES DOYENNÉS

de Faouët et Gourin



PRON ESKOPTI GUÉNED

EVIT BRO GOURIN HAG AR FAOUET

† *E hano an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel. Evelsé bezet greit.*

Asamblet omb aman, ma breudeur, hervez gourc'hemen an Iliz, evit adori an Aotrou Doue, en trugarékat eus é vadobérou, goulén digantan ar pardon eus hon péc'hejou, hag ar grasou hon eus ezom.

O sonjal er péc'hejou hon eus greit dre sonjou, dre gomzou, dre obérou, laramb gant keuz ha glac'har eun akt a gontrision :

« Ma Doue, keuz am eus da vout ho ofanset, abalamour mazoc'h ar santelez memes ha ma tisplij d'oc'h ar péc'hed. Ho pedi a ran, dre veritou Jezus-Krist, d'am fardoni. Me a bromet, gant sikour ho kras, n'ho ofansin mui, hag e rin pinijen. »

Dléet eo d'imp pedi evit an Iliz hag evit ar Frans, evit hon Tad santel ar Pab, evit an Aotrou Eskob hag evit ar veleien eus an Eskopti, evit miret ha kreski ar Feiz, evit konversion ar bec'herien ha perséverans ar ré just, evit deskadurez kristen ar vugale hag an dud iaouank, evit ar re glanv pe var o zrémen, evit ar soudarded hag ar varteloded, evit hor c'hérent, hor mignoned hag hon énebourien.

Ni bedou c'hoaz evit oll madoberourien an iliz-man, evit ar ré e ra « diner ar relijion » ; — evit H... e ra hirio ar bara beniget hag evit H... en rei ben dizul ; — evit ar re o deus reit eun dra benak é prof... Evité, hag evit ar c'hentan ac'hanomp a iei dirak Doué evit bout barnet, ni a larou eur Bater hag eun Ave Maria :

« *Pater noster...* pé *Hon Tad a zo en nenv...* »

« *Ave Maria...* pé *Me ho salud, Mari...* »



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2026

Pedamb ive evit eneoù ar purgator, dreist oll evit hor c'hérent, hor mignoned, a ré zo maro a névez-zo er barréz-man, evit ar soudarded maro er brézel... (evit H... ha H... a vo kañnet servijou evité ar suhun-man). Ni a bédó ive evit ar re dreménet a zo bet tennet diganté guerz ar servijou hag oferennou o doa lakeit :

DE PROFUNDIS clamavi ad te, Domine : Domine exaudi vocem meam.

Fiant aures tuæ intendentes : in vocem deprecationis meæ.

— Si iniquitates observaveris, Domine : Domine quis sustinebit ?

Quia apud te propitiatio est : et propter legem tuam sustinui te, Domine.

— Sustinuit anima mea in verbo ejus : speravit anima mea in Domino.

A custodia matutina usque ad noctem : speret Israel in Domino.

— Quia apud Dominum misericordia : et copiosa apud eum redemptio.

Et ipse redimet Israel : ex omnibus iniquitatibus ejus.

Ÿ. Requiem æternam dona eis, Domine. — R. Et lux perpetua luceat eis.

Ÿ. Requiescant in pace. — R. Amen.

Ÿ. Domine, exaudi orationem meam. — R. Et clamor meus ad te veniat.

Ÿ. Dominus vobiscum. — R. Et cum spiritu tuo.

OREMUS. — Deus veniæ largitor et humanæ salutis amator, quæsumus clementiam tuam, ut nostræ congregationis fratres, propinquos et benefactores, qui ex hoc sæculo transierunt, beata Maria semper Virgine intercedente cum omnibus Sanctis tuis, ad perpetuæ beatitudinis consortium pervenire concedas. Per Christum Dominum nostrum : — R. Amen.

Ÿ. Requiem æternam dona eis, Domine. — R. Et lux perpetua luceat eis.

Ÿ. Requiescant in pace. — R. Amen.

Mar nen deus gouel berz ébet, laret : Nen deus er suhun-man gouél berz ebet hag a hell miret ouzoc'h d'ober ho labouriou pem-deiek.

Ar gouéliou eus ar suhun-man e zou : hirio..., varc'hoaz...

Aman a ve diskleriet an deioù iun ha vijil eus ar suhun, an oferennou a zevosion, ar prosesionou...

AN DIMEOU. — Bout a zo digont a briedelez etre H. H. mab en oad (*pé* neket en oad) da H. H. ha da H. H., gañnet é H... hag é chom é H..., eus eun tu ; — ha H. H., merc'h en oad (*pé* neket en oad) de H. H. ha da H. H. gañnet é H... hag é chom é H..., eus an tu all ; — evit ar c'hentan embann (*pé* an eil, *pé* an dri-vet embann. *Laret ive mar deus bet dispans eus eun embann pé eus eun dalc'h benak.*

An hini a anavfé eun dalc'h benak énep d'an alliansou-man, a vefe ret dehon en diskleria, didan boan a béc'hed.

AR LEZEN GRISTEN

LAKEIT É BER GOMZOU

EVIT BOUT LENNET, D'AN HANV, VARLEG'H AR PRON.

Aman e tléamb deski guelloc'h ar pez a zo ret d'imp kredi hag ober evit gounit ar baradoz. Selaouet mat eta ar lezen gristen lakeit é ber gomzou.

§ I. — AR GREDO, PÉ SIMBOL AN EBESTEL.

Ar brasan guirionezou e dléamb kredi evit bout salvet, a zo skrivet er Gredo pé Simbol an Ebestel : *me gred é Doue an Tad...* Er Simbol-man é kaver, é ber gomzou, ar guirionezou o deus prezeget an Ebestel, goude m'o doa o desket digant Jezus-Krist é-unan.

An nenv hag an douar a zisko splann d'an oll e zo eun Doue ; hag ean e-unan en deus en em ziskoeit meur a vech d'an dud. — Doue a zo eur spered parfet, an oll vad hag ar santelz memes. Tri fersonn a zo é Doue : an Tad, ar Mab hag ar Spéred-Santel ;

mes nen deus é Doue nemet eun natur. Raksé an Tad a zo Doue, ar Mab a zo Doue, ar Spered-Santel a zo Doue ; ha nen dint nemet eun Doue henn kin. — *Setu aze, é ber gomzou, mister an Drinded Santel.*

Doue en deus krouet an nenv, an douar ha kement tra a zo ; o greit en deus eus a netra, dré eur gomz henn kin. Ar ré gaeran eus krouadurien Doue eo an Eled en nenv, hag an dud var an douar. — An Eled a dlée adori Doue hag en servija ; mes eur loden vras anehé o deus en em zavet enep da Zoue, hag a zo bet taolet en ifern evit bepred ; ar loden all a zo chomet fidel dehon hag a zo eurus er baradoz. — Adam hag Eva, hon tad ha mam gentan, a oé bet lakeit en eur lec'h hanvet Baradoz an douar ; eun dra henn kin a oa difennet diouté : debri eus frouez unan eus ar gué.

Mes ind a zizentas ; hag abalamour da gementsé é oant bet taolet er menez eus an dachien kaer elec'h ma oant, kondaonet d'an dic'houiegez, d'ar goal dechou, da boaniou ar vuez ha d'ar maro, henn gallout mont d'ar baradoz. Oll an dud var o lerc'h, nemet ar Verc'hez Vari, o deus bet o lod er stad maleurus-sé, hanvet ar *pec'hed orijinel*. An Aotrou Doue koulskoude a brometas eur Salver da vab-den. Ha, pa oa deit an amzer merchet, Mab-Doue, an eil fersonn eus an Drinded-Santel, a geméras, etre diougostez ar Verc'hez gloriüs Vari, eur c'horf hag eun ene hennel ouz hon ré-ni. — *Setu mister an Inkarnasion.*

Jezus mab Doue, hor Salver, a zo gañnet, da noz an Nédélec, en eur c'hraouig paour é Béthléem, bro Judé. Bévet en deus var an douar tri bloaz ha tregont, ebarz ar baourantez hag al labour. Goude m'en doa prézeget an Aviel, e oé krusifiet da Véner ar Groaz, hag é varvas évit péa dlé ar *pec'hed* ha meritout d'imp ar baradoz. — *Setu mister ar Redampson.*

Arlerc'h é varo, Jezus e oé bet liénet ha lakeit er bez, e-pad ma tiskenne é ene d'an Ifernou ; an drivet dé, da laret eo, da zul Fask, é savas leun a c'hloar eus ar bez. Daou-ugent dé varlerc'h, da iaou an Asansion, é pignas d'an nenv hag é azeas en tu déou da Zoue an Tad oll-galloudek. Dek dé arlerc'h,

da zul ar Pantekost, é tigasas ar Spered Santel d'é Ebestel evit rei dehé sklerijen ha nerz da brézeg an Aviel ér pevar c'horn eus ar bed.

Hor Salver Jezus-Krist en doa choazet daouzek Abostol, ha lakeit Sant Per da vout o mestr. An Iliz a zo ar bobl kristen a heuil lezen hor Salver Jezus-Krist didan galloud an Tad santel ar Pab hag an Eskibien. Hon Tad santel ar Pab a zalc'h é kenver ar gristenien lec'h Sant Per, hag a zo evelsé ar pen eus an Iliz. An Eskibien a zo mestr, didan galloud an Tad santel ar Pab, peb hini en é eskopti ; didan galloud an Aotrou Eskob, e zo eur person é pep parrez.

Ret eo d'imp kredi kement a zesk d'imp ar ré a zo é pen an Iliz, rak ma komzant é hano Jezus-Krist.

Ar ré n'hellant ket fazia en Iliz a zo hon Tad santel ar Pab pa za da ziskleria eur virionez benak da vout kredet gant an oll gristenien, hag an Eskibien, pa en em glevant oll assemblez evit rei da anaout eur virionez benak eus ar relijion.

Hervez komzou an Aviel, guir Iliz hor Salver Jezus-Krist a dle bout : unan, santel, katolik hag apostolik.

Ne gaver ar merchou-sé nemet en Iliz romen, da laret eo, en Iliz a zo didan galloud an Tad santel ar Pab, eskob ar gér a Rom. An Iliz romen a zo eta guir Iliz hor Salver, hag en-ni henn kin a heller bout salvet.

Oll ar gristenien o deus o lod é madou an Iliz ; ouspen, gellout a rant pedi ha meritout grasou an eil evit égile ; ind a hell goulén sikour gant ar Sent eus ar baradoz, ha rei sikour o-unan da éneou ar purgator : Kement-sé a zo hanvet *Komunion ar Sent*.

Da fin ar bed, Jezus a zeï da varn an oll dud. Oll an dud a zavou neuze eus a varo da veo, hag a iei korf hag ene dirak hor Salver evit bout barnet : ar ré vat a iei gantan d'ar baradoz, hag ar ré fall a vo taolet en ifern. Ar baradoz hag an ifern a badou da viken.

§ II. — GOURC'HEMENNOU DOUE HA RÉ AN ILIZ.

Evit mont d'ar baradoz neket aoualc'h bout badéet ha kredi ar guirionezou a zesk d'imp an Iliz ; ret eo c'hoaz senti ouz lezen an Aotrou Doue, da laret eo, ouz gourc'hemennou Doue. Dek gourc'hemen Doue a zo :

Gourc'hemennou Doue.

1. Eun Doue hemp kin a adori, ha dreist pep tra oll a gari.
2. Hemp kaoz é hano na doui ket, nag ive netra all ebet.
3. Miret a ri an oll suliou, gant euvrou mat ha pedennou.
4. Da dad, da vam a enori, ha da vuez a astenni.
5. Ha mir ne lazi den ebet, nag a galon, nag a éfet.
6. Lubrik mir ne vézi nepret, didan boan da veza daonet.
7. En em ziuall diouz laeroni, na domaj da nésan na ri.
8. Na gevier, na fals testeni, mir birviken na lavari.
9. Na c'hoanta dre luxur pec'hi, nag é sonj vil n'en em bliji.
10. Madou ré-all ne zezir ket, evit o c'haout hemp guir ebet.

Gourc'hemennou an Iliz :

1. Kléo devot a benn-da-benn, bep sul, bep gouél, an oféren.
2. Neuze pep labour a lezi, evit da Salver enori.
3. Kovès a ri da vihana, eur vech er bloaz, hemp nac'h netra.
4. Ha da Bask e sakramanti, rak-sé é stad vat a vevi.
5. Iun a ri an daouzek deiou, ar c'hoareiz hag ar vijiliou.
6. Vit ar gristenien d'ar guéner, é ma vijil é peb amzer.

Mankout da zenti ouz unan benak eus ar gourc'hemennou-sé a zo eur pec'hed.

Daou sort pec'hejou a hellamb ober : ar pec'hed marvel hag ar pec'hed véniel. — Ar pec'hed marvel e ra ar maro d'an ene en eur lemel digantan buez gras Doue, hag en lakat e ra en danjer da goéhel en ifern. — Ar pec'hed véniel a c'hoanna hor c'harantez é kenver an Aotrou Doue, hon doug a nebeudigou d'ar pec'hed marvel, hag a denn var é lerc'h poaniou a vo ret d'imp andur er bed-man pé er purgator. — Ar goal dechou a zo mamennou a

bec'hed ; ar goasan techou fall a zo : an ourgouil, an avaristed, ar luxur, an avi, ar gourmandiz, ar gounar hag ar leziregez.

Neket aoualc'h diouall diouz ar pec'hed ; ret eo c'hoaz heuil hent ar vertuz. Ar vertuz a zo eun donezon a berz Doue hag a ra nerz d'imp d'ober ar mad ha da bellat diouz an droug. Daou sort vertuziou a zo : ar vertuziou théologal hag ar vertuziou moral. — Ar vertuziou théologal a zo : ar Feiz, an Espérans hag ar Garantez. — Kals a vertuziou moral a zo ha peder dreist ar ré all : ar furnez, ar justis, an nerz hag an dempérans.

Devériou ar c'hristen. — 1° E kenver Doué : Eur c'hristen a dle kredi é Doue, miret é c'hourc'hemennoù, reseo é zakramanchou, hag en pedi. Dléet eo dehon ober é zevériou a relijion, ha, bep sul, dilezel al labouriou difennet ha mont d'en oféren.

2° E kenver é nésan : Eur c'hristen a dlé karet é nésan éveldon é-unan, abalamour da zoue, klask hag ober dehon ar memes vad a garfé a ve greit dehon é-unan. Eun déver eo evitan karet é énebourien ; Jezus-Krist a c'hourc'hemen pardon hag ober vad dehé ; reit en deus d'imp ar skuer a gementsé. Mar hon eus greit gaou d'an nésan en eur mod benak, é ma dléet d'imp en digol eus an droug hon eus greit dehon.

An tadou hag ar mamou a dlé karet o hugale, o zével é doujans Doue, o c'horrija eus o goal dechou ha rei skuer vat dehé. O déver eo o lakat er skoliou kristen ha péa evit kementsé mar bé ret. — Ar vugale a dlé karet o zad hag o mam, o énor, zenti outé hag o zikour é ézomou o c'horf hag o ene.

Ar vistri a dlé péa o c'houmanant d'ar servijerien, bout mat evité, ha rei dehé amzer d'ober o devériou a relijion. — Ar servijerien a dle senti d'o mistri, diouall da noazout dehé, hag ober mat o labour.

Ar guir gristenien a dlé c'hoaz enori ar ré o deus galloud varnehé eus aberz an Iliz pe eus aberz ar gouarnamant, ha zenti outé er pezh nen dé ket énép da lézen Doue. Ret eo mont da vouézia seul vech ha ma ve mouéziou, ha voti hépred evit ar ré a hellou

ar guellan servij ar vro ha difen ar religion : eun déver a gousians eo.

3° En é genver é-unan. — Eur c'hristen a dlé derc'hel sonj bépred a bromessaou é Vadiant, eus an devériou eus é stad. ober brezel d'é dechou fall ha pratika ar vertuziou kristen : an izelded, ar baourantez a galon, ar burted, ar garantez é kenver an nésan, ar volesti, an douter hag an nerz-kalon.

§ III. — AR SAKRAMANCHOU.

Bout a zo seiz sakramant savet gant hor Salver Jezus-Krist evit santelat hon ene : ar Vadiant, ar Gonfirmasion, Sakramant on Aoter, ar Binijen, an Nouen, an Urz hag ar Briedelez.

Ar Vadiant eo ar sakramant a lam ar pec'hed orijinel, hag hon groa kristenien, bugale da Zoué ha d'an Iliz. — Pa zo danjer a varo, pep den a hell hag a dlé badéa. — Evit badéa eo ret skuilla dour naturel var benn an hini a vadéer, ha laret er memes amzer : « Mé ho padé, é hano an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel. » Hemb ar Vadiant n'hell den bout zalvet ; setu perak é ma dléet kas da vadéa, er founusan ma heller, ar vugale nevé-gañnet.

Ar Gonfirmasion zo eur sakramant hag a ra d'imp ar Spered-Santel gant é oll donézonou hag hon groa kristenien barfet, en eur greski en-omp grasou ar Vadiant. Hi a ra d'imp nerz ha kalon da zele'hen da lezen Doue, na pa vefemp disprizet ha memes laket d'ar maro.

Sakramant an Aoter a zo hor Salver Jezus-Krist, korf ha goad, didan zeblant ar bara hag ar guin. — Evit komunia pe réseo Sakramant an Aoter, é ma ret bout var iun abaoué hanternoz, nemet pa ver goal glanv, bout é stad a c'hras ha kaout eur volantez vat ha santel. Ret eo da bep kristen, memes d'ar vugale erru en oad a rézon, komunia da vihanan eur vech er bloaz, da Bask, ha pa n'em gaver en danjer a varo. — Eun dra talvoudus bras eo komunia aliesoc'h, pa ver é stad vat d'en ober :

Ar bara hag ar guin a zo konsakret é sakrifik an oféren, pa lar ar béleg, aberz Jezus-Krist, komzou ar Gonsékration. — Sakrifik an oféren a zo ar memes sakrifik gant hini ar groaz, greit a nevez hemp na ve skuillet goad hor Salver var an aoter evel var ar groaz. Ofret a ve sakrifik an oféren da Zoue hemp kin, evit en adori, en trugarekat, goulén é c'hrasou ha kaout ar pardon ouz hor pec'hejou.

Ar Binijen zo eur sakramant hag a bardon ar pec'hejou greit goudé ar Vadiant. — Evit reseo mat sakramant ar Bénijen, éma rét da gentan klask piz mat ar pec'hejou hon eus greit, poania da gaout eur guir glac'har hag he goulén mat digant Doue. Ret eo varlec'h kovesat da vihanan an oll bec'hejou marvel, gant eur volantez ferm da guitat ar pec'hed ; digol an nésan eus ar gaou greit dehon en é enor pe en é vadou, en é ene pe en é gorf ; pea hon dlé da Zoue dre ar binijen merchet gant ar c'hovésour, dre ar bédén, ar iun, an aluzén, poaniou ar vuez hag an induljansou. — Oll ar re o deus greit eur pec'hed marvel benak goude o badiant a zo ret dehé réséo sakramant ar Binijen evit bout pardonet. Mar n'hellant ket kovésat e tléont da vihanan ober eun akt a gontrisiou parfét.

An Nouen a zo eur sakramant hag a rer d'an dud klanv en danjer a varo évit konforti o ene hag o c'horf. — Evit réseo an Nouen, é tléer bout é stad a c'hras, ha, mar n'heller ket kovésat é ma ret da vihanan kaout kontrision. Pa weler unan benak goal-glanv, é tléer rei dehon an tu da réséo é sakramanchou gant anaoudigez.

An Urz a zo eur sakramant hag a gonsakr ar veleien, hag a ra dehé ar grasou d'ober mat an deveriou eus o c'harg santel. — Eun enor bras eo bout galvet da vout béleg ; n'eus stad all ebet kaeroc'h na santeloc'h. — Eun tad hag eur vam hag o defe bugale galvet d'ar stad a veleg a dlé o zikour da anaout ha da heuil bolantez Doue.

Ar Briedelez a zo eur sakramant hag a laka eun allians hervez Doue étre eur goaz hag eur vaouez, hag a ra dehé grasou evit beva mat en o stad ha zével mat o bugale. — Hemp sakra-

mant ar Briedelez n'eus ket a briejou etouez ar gristenien. — Ar guir briedelez ne hell ket bout torret nemet dré varo unan eus an daou bried. — Eun niver bras a briejou a zo maleurus, abalamour na vevant ket hervez lezen Doue.

§ IV. — AR BEDEN.

Gras Doue a zo eun donézon a ra d'imp an Aotrou Doue, abalamour da veritou Jezus-Krist, evit hon zikour d'ober hor zilvidigez. — Bout a zo daou sort gras Doue : gras ar santelez, a chom en ene hag hon laka da vout santel dirak Doue ; ha gras sikour Doue, a zo eun nerz d'ober ar mad ha da bellat diouz an droug. Reseo a ramb gras Doue dré ar sakramanchou ha dré ar beden.

Pedi a zo sével hor spered hag hor c'halon etrezek Doue evit en adori, en trugarekat ha goulén sikour digantan. — Ret eo pedi gant evez mat, gant izelded a galon, gant fians, ha hemp ehan. — Ret eo pedi an aliesan ma heller, ha dreist pep tra da vitin ha da noz, pa doster ouz ar sakramanchou, pa'nem gaver en dentasion hag en danjer a varo.

Ar huellan peden a hellamb ober a zo peden hor Salver :

« *Hon Tad a zo en nenv...* », rak ma eo hor Salver en deus hé greit, ha ma kaver en-ni, é ber gomzou, ar pezh a dléamb goulén : gloar evit an Aotrou Doue, ha pep seurt madou evidomp hon-unan.

Arlerc'h an Aotrou Doue, ni a dlé pedi ar Verc'hez gloriüs Vari, an Eled hag ar Sent, rak men dint mignoned an Aotrou Doue ha ma hellant hon sikour. — Ar huellan peden en enor d'ar Verc'hez Vari eo salud an Arc'hél : *Me ho salud Mari...*, gant ar beden-sé é ma greit an Angelus, ar chapeled, hag ar Rozéra.

En ilizioù en em zastum an aliesan ar bohl kristen evit renta da Zoue an énor dléet, ha goulén digantan ar grasou o deus ezom. Lod eus an ilizioù a zo bet konsakret gant an Aotrou Eskob ; ré all nen dint bet nemet beniget ; oll e tléant bout enoret : eun iliz a zo ti an Aotrou Doue.

Al lec'h santelan eus an iliz eo an *aoter*, rak ma servij da laret an oféren. An oféren a zo eur memes sakrifis gant hini ar groaz. Peder loden a zo en oféren : — ar pedennou kentan betag arlerc'h an Aviel ; — ar prof betag ar *Sanctus* ; — pedennou ar gonsékrasion betag ar *Pater* ; — hag ar gomunion.

Netra guelloc'h eget klevet bemdez an oféren ; netra jauja-ploc'h d'ar sul eget mont d'an oféren-bred : en-ni e vé kañnet, pedet evit ar barrez, greit an *Asperges*, laret pedennou hag avizou ar pron, reit ar bara beniget.

An ofis eo ar psalmou ha pedennou a ve laret pe kañnet bemdez, evit ar gristenien, gant ar venec'h hag ar véleien ; ar gospérou eo ar loden eus an ofis a ve kañnet d'an anderv-noz : eun dra vat eo mont d'ar gospérou evit santifia guelloc'h ar sul.

Ar pedennou, an oféren hag an ofis, a chanj hervez ar goueliou. Pep kristen a dlé anaout ar goueliou brasan eus ar bloaz : arlerc'h an Avent, gouel an Nédeleg, ha gouel ar Rouaned ; arlerc'h ar c'hoareiz, Pask, an Asansion, hag ar Pantekost. Ar sulioù arlerc'h ar Pantekost a zigas sonj d'imp eus hon deverioù epad ar vuez-man, hag an divéhan sul arlerc'h ar Pantekost a gomz eus ar varn jénéral.

Bout a zo eun niver bras a vreudiezoù hag a zevosionoù : ar ré gentan a zo an devosionoù é kenver hor Salver Jezus-Krist : ar ré a zo evit enori Sakramant an Aoter pe Kalon Sakr Jésus, Hent ar Groaz ; — Arlerc'h é ta an devosionoù é Kenver ar Verc'hez Vari : ar Rozéra, ar chapeled, an *Angelus*, ar Congrégasion, ar Skapuler ; — hag erfin, an devosion é kenver hon Sent patroned... N'hellamb ket en em rei d'an oll devosionoù : choajamb ar ré a jauj ar muian ouz hon stad hag a zo ar guellan deit gant an Iliz, staget ive outé ar muian a induljansou.

§ V. — AN AVIEL.

An Aviel a zo buez hor Salver Jezus-Krist skrivet gant pevar Avielour : sant Mahé, sant Mark, sant Lukas ha sant Ian. An dud santel-man o deus skrivet peb unan d'é du hag hervez an anaou-

digez en doa eus an traou. An Aotrou Doue o dougé da skriva hag a ré sklerijen dehé ; setu perak n'o deus ket gallet en em drompla.

Mat a vefé kaout é pep tiegez leor buez hor Salver Jezus-Krist. Ret eo da vihanan anaout ar pennadou kaeran ; — penos e tas an arc'hél Gabriel da ziskleria da Vari é oa choajet evit bout mam da Zoue ; — penos e ias neuze ar Verc'hez Vari da welet hé c'heniterùéz, santez Elizabeth, mam da sant Ian-ar-Badéour ; — penos é oé gañnet hor Salver, é Bethléem, hag adoret lerc'h-var-lerc'h gant pastored ha rouaned ; — penos é oé bet ret dehon kuitat é vro abalamour d'ar roue fall Herodes, ha penos é tas di-veatoc'h da chom da Nazareth, betag an oad a dregont vloaz.

En amzer-sé, sant Ian-ar-Badéour a oa brudet bras, hag an dud a ze d'en kaout a vandennou evit bout badéet gantan. Jezus a zas ivé. Ha sant Ian en em lakas da laret d'an dud : « Henez eo Oan Doue, ar guir Mési : heuliet ean ». Evelsé é kavas Jezus ar ré gentan eus é Ebestel. — Setu aman hano an daouzek Abostol : Per hag é vreur André, Jakés mab Zébédé hag Ian é vreur, Philip ha Bartélémi, Mahé ha Thomas, Jakés mab Alfé ha Jud é vreur, Simon ha Judas.

Emesk an dud a zo bet tennet diouz ar pec'hed ha santeleít gant hor Salver Jezus-Krist, ar ré anaouétan a zo : ar Samaritanéz étal puns ar patriarch Jakob ; ar baianez a vro Canaan deit da glask sikour evit hé merc'h ; Zaché ar perseptour ; Mari-Madalen ar bec'herez ; ar laer mat var ar groaz ; an daou zisipl diskonfortet var an hent d'Emmaüs.

Hor Salver Jezus-Krist en deus greit kalz a viraklou, dré garantez é kenver an dud, hag ivé evit diskouez e oa Doue, evel ma laré. Daou-ugent henn kin anehe a zo merchet en Aviel. Setu aman ar ré vrasan : — pa droas an dour é guin en eun eured, e bourc'h Cana ; — pa c'hourc'hemennas d'an avel ha d'ar mor tével ; — pa gerzas var an dour ; — pa greskas ar bara evit maga eur bobl a dud ; — pa zisec'has ar figezen ha ne zougé ket frouez ; — pa en em ziskoas lugernus var menez Thabor.

An darn vrasan eus é viraklou a zo bet greit evit guellat d'ar ré glanv, rei ar guéled d'ar ré dal, er c'hléved d'ar ré vouar,

ar gomz d'ar ré vut, an iec'hed d'ar ré paralizet ha d'an dud lor.

Dré der guech ivé, en deus digaset beo adare tud hag a oa maro : merc'hig Jair maro eun herrad arok ; mab intanvez Naïm, pa oe an-dud ouz er c'has d'an douar ; ha Lazar laket er bez abaoué pevar dé.

Komzou hor Salver Jezus Krist a zo strévet oll dre an Aviel, ha ne gaver netra kaeroc'h. Ho pet sonj da vihanan eus ar prezegou a ré aliez divarben buez mab-den er bed-man. Rouantelez an nenv, emé-ean, a zo henvel ouz eun den a ia da glask dévézourien da beb eur eus an dé ; — henvel eo ouz an hader a daol greun é pep sort douar ; — henvel eo ouz an dud e oé bet pedet d'eur banket ha n'o doé ket prizet dont ; — ouz eur park a zo ebarz louzeier fall ha guiniz mesk-ha-mesk.

Ha Jezus e laré c'hoaz histoar ar mab prodig ; — hini ar Samaritan karantezus ; — hini ar farizian hag ar publikan ; — ar merc'hed diavis hag ar merc'hed fur ; — ar pastor mat.

En Aviel e kaver ive pasion, maro ha résureksion hor Salver Jezus-Krist. Rentet en doa ar vuez da dud varo ; mes ober e ras guel ; rak, tri dé arlerc'h é varo, é tas beo adare, dré é c'halloud é-unan.

An Ebestel a zo maro evit renta testeni eus ar virionez-man. Varnehi, dreist oll, é ma diazéet hor feiz. Varnehi ive é ma diazéet hon espérans : ni a hell esperout sevel ive eun dé eus a varo da veo, evel hor Salver, ha, mar vimp kavet fidel, ni hor bo lod gantan en é rouantelez da virviken.

ALIOU MAT DA REI D'AN DUD IAOUANK DA ZÉ O EURED.

I

An Aotrou Doue, er pen kentan eus ar bed, pe savas ar Briedelez, e ras anehi eun alians santel ha ne hell bout torret nemet dré ar maro. Hor Salver Jezus-Krist en deus hi laket da vout eur sakramant pé eur vamen a c'hrasou evit ar priejou.

« Ar Briedelez, emé Sant Paul, a zo eur sakramant bras ». Ia, é guirionez, bras eo dré mé ma eul limaj eus an alians a zo etre Jezus-Krist hag an Iliz; bras eo ivé dré ar grasou hemp par a ra d'an daou bried evit miret guelloc'h an deveriou nevez eus o stad.

Peguir ar Briedelez a zo ker santel dirak daoulagad ar feiz, es eo goût ne dléer ket en em lakat, na béva er stad-sé, hervez lézennou ha modou dirol ar bed, mes hemp kin hervez Doue hag é lézen, evel ma jauj ouz guir gristenien.

« Ni zo bugale ar Sent », e laré guechal Tobi d'é bried, « ha ne dléamb ket béva er Briedelez evel ar ré ne anaouant ket an Aotrou Doue ». Evelsé ive e tlé komz eur c'hristen.

Araok dimezi hag arlerc'h bout euréjet, ar gristenien a dlé kaout bepret en o spered sonjou ar feiz: dléet eo dehé chom fidel an eil d'égile ha miret an honestiz, en eur zerc'hel sonj penos ene ha memes korf an den a zo eun templ d'ar Spered-Santel; dléet eo dehé rei d'o bugale eun deskadurez kristen. en eur sonjal mat penos ar Briedelez nen dé nemet evit rei bugale da Zoue ha d'an Iliz, servijerien da Jezus-Krist, ha sent d'ar baradoz.

Dever ar goaz a zo, hervez Sant Paul, « karet é vaouez evel ma kar Jezus-Krist an Iliz. » Ean a vo éta dous ha karantezus en hé c'henver; ean hé c'hennerzou en oll poaniou eus ar vuez; ean a ziuallou é pep féson da bellat dioutan é-unan kalon an hini en deus en em reit oll dehon betag ar maro.

Ar vaouez kristen a dle, hi ive, karet hé fried, dougen respet dehon, ha senti outan evel ma ra an Iliz é kenver hé fried Jezus-Krist. Henvel ouz ar vaouez nerzus-sé a gomz anehi ar Skritur-

Sakr, hi en em rei a galon vat d'hé labour, a glaskou dastum hag amercz kentoc'h eget goal-zispign, a lakei urz vat en hé ziegez, evit ma iei mat an traou ha ma vo istimet hé fried émesk an dud.

Mar bé. ouspen, douget mat evit an Aotrou Doue, fidel d'ar beden noz ha mintin, aketus d'he oll deveriou a gristenez, hi a c'hounidou da Zoue oll ar ré a vévo endro dehi hag a dennou kalz grasou var an tiegez abez.

O daou e tléant dere'hel sonj penos eo dré garantez ha dous-ter an eil é kenver égile, é teuint a ben da viret ar peoc'h ha da gaout an eured étre-zé.

Ia, ma breudeur, mar heuliet an alioù aran d'oc'h a berz Doue hag an Iliz, é guirionez c'hui a vo eurus, é kement ma heller bout er vuez-man. A dra zür, eur vech pe eun all, eur groaz benak a bouezou var o tiouskoaz; mes pa vit daou evit hé dougen, ar groaz-sé a vo diou vech skanvoc'h.

Joaïou ive ne vankint ket d'och; ha pa vo joa evit daou, ar joa a vo diou vech brasoc'h. Ar c'haeran eus ar joaïou a zo ouz ho kortoz en eur vuez all: goude ma ho po en em sikouret d'en em santelat er bed-man, c'hui en em gavo c'hoaz, mar plij gant Doue, an eil é kichen égile er baradoz, evit bout eurus en-an da virviken. Evelsé bezet greit.

II

Oll ho kerent ha mignoned bodet en dro d'oc'h breman a zisko splann é teut aman evit eun dra talvoudus meurbed.

Ia, é guirionez, an eured kristen a zo eun dra talvoudus bras.

Mar deus tud ha na welant en eun eured nemet divertisamant ha guiskamanchou kaer, piou benak a zo eun tamig pozet a gompren mat talvoudigez eun eured kristen.

Piou ne vefe ket tenereit é galon o velet daou zen iadouank, evel men d'oc'h c'hui, ouz en em rei an eil d'égile evit oll o buez? Brao eo o guelet, erru en oad da heuil o bolontez, o tont d'en em c'hloestra asamblez da eun dra, unan eus ar ré kaeran a zc er

bed : sevel eun tiegez nevez da zerc'hel lec'h an hini a guitant, eun tiegez kisten heuvel ouz hini o zud.

Dont a rant hemp sellet kalz ouz ar boan pé ouz ar blijadur a gavint var o hent ; o sonj kentan a zo rei da ré all, d'o bugale, ar pezh o deus bet o-unan digant Doue : ar vuez. Setu azé traou aoualc'h evit gounit dehé istim ha karantez an dud.

Ar c'haeran tra koulskoude eo o guelet o vont hemb aoun ebet en arben d'an deveriou, d'ar poaniou ha trubuillou a zo ouz o gortoz. Mont a rant hemb aoun, rak fiars o deus en-né o-unan : leun int eus an nerz kalon a gaver bepret é tud iaouank ; fiars o deus an-eil en égilé : e vint daou o tougen ar sam, unan a sikourou an all ; fiars o deus dreist pep tra en Aotrou Doue, ha gant Doue hag é c'hras, petra a helfeint douja ?

Mar lakefent o oll fiars é nerz an den, er volantez vat o deus, er garantez o deus an eil evit égilé, me larefé dehe : « Diouallet d'en em drompla ! Anaouet guelloc'h pegen goann oc'h, ha krenet gant aoun ne vefec'h ket krenv aoualc'h evit dougen ar sam a gemérit. » Mes p'o guélan o tont d'an iliz d'en em rei an eil d'égile dirak Doue, me lar neuze e hellant kaout fiars, rak nerz Doue a vo ganté bepret.

Ar Briedelez, mar dé eun dra gaer anehi hi unan, a zo c'hoaz brasoc'h ha kaeroc'h pa zeller outi gant daoulagad ar feiz : rak neuzé nen dé ket mui eun dra greit gant an dud hemp kin, mes eun dra greit gant Doue é-unan, eun dra santel, eur sakramant.

Doue en deus fellet dehon rei da vab-den eur sakramant evit er santelat é pep stad a vuez. Penos éta a vefe chomet hemb ober eur sakramant evit santelat stad an dud diméet ? E guirionez, greit en deus eus ar Briedelez eur sakramant kaer, a zo staget outi grasou talvoudus.

Da gentan, ar sakramant-sé a gresk é eneou an daou bried ar c'hras a zantelez a dlé bout dija en-né, araok ma tant d'er reseo. Ha pe sort liam kaeroc'h ha stertoc'h a helfent kaout en dé ma en em stagant an eil ouz égilé, eget an hini a zo bet santelelt gant an Aotrou Doue ? Petra a hellefe guelloc'h rei fiars dehé e veint eurus hag e chomeint fidel an eil-d'égilé, eget ar sonj é oa

Doue ganté da zé o eured, hag e chomou ganté, mar karant, épad oll o buez ? E guirionez, peguir e pad ar sakramant keit hag o stad, keit hag o buez, é ma dléet dehé, evit ober enor d'o stad, en em viret é gras Doue épad o buez.

Sakramant ar Briedelez a daol c'hoaz en ene grasou kaer all : rak pep sakramant a ra d'an neb er resev, ar grasou en deus ezom hervez é stad. Pe sort grasou kaer a gav an dud diméet é sakramant ar Briedelez evit ezomou o stad nevez !

Grasou a garantez, evit ma en em gareint étre-zé hervez Doue, ha ma padou ar garantez-sé betag ar maro, en despet d'an oll trubuillou ha poaniou eus ar vuez !

Grasou a nerz hag a furnez, da ober dehé gouzanv gant piasanted pep poan ha diéamant ; da ren mat o ziegez, ha da zeyel o bugale é doujans Doue !

Oll ar grasou-sé, hor mam santel an Iliz e ia d'o rei doc'h breman : digoret mat ho kalon d'o reseo.

Épad ma vin o laret varnoc'h pedennou an Iliz, dreist oll épad an oféren, plijet gant ho kerent ha mignoned a zo en dro d'oc'h, unani o fedennou gant ma ré, evit ma tiskennou stank varnoc'h grasou an Aotrou Doue. Evelse bezet greit.

III

Deit oc'h hirio d'an iliz da c'houlén digant Doue santelat ho stad a vuez dre sakramant ar Briedelez.

Ar c'honsantamant a rit aman an eil d'égile, dirak ho testou, dirak ar beleg ha dirak Doue, a zo evit padout bépret : « Ar pezh a zo skolmet gant an Aotrou Doue, a lar d'imp hor Salver, ne hell ket bout dilamet na torret gant den ebet ». N'eus nemet ar maro hag a hellou lakat disparti étre-zoc'h.

C'hui a dléou en em garet bépret evel hirio, en em sikour en ho ezomou hag en em viret léal é pep tra. Mar ra an Aotrou Doue bugale doc'h da sével, c'hui o digasou ar c'hentan ma helléet d'an iliz da vadéa ha da vercha o hano var leor-ar-badianchou ; c'hui

o savou evel me ma dléet, hag o lakei en eur skol kristen, evit ma veint desket hervez lezen Doue.

C'hui a stagou eur groaz en dachen kaeran ha splannan eus ho ti ; c'hui a gonsakrou ho tiegez da Galon sakr Jezus ; c'hui a c'houlennou sikour digant ar Verc'hez ha Santez Anna seul vech ha m'ho po ezom ; ha ne ankoueit ket biken penos en eun tiegez kristen oll an dud a dlé laret asamblez ar pedennou eus an noz.

Bévet breman eurus ho taou, keit ha ma plijou gant Doue ho lezel var an douar ; bévet eurus gant ho pugale, betag an drivet hag ar bévarvet rumad, hag heuliet lezen Doue é pep tra, evit ma ho tiouallou diouz an droug, ha ma rei doc'h, arlerc'h ar vuez-man, mont ho taou d'en haout en eur vro all eurusoc'h c'hoaz eget houman. Evelsé bezet greit.

Er 1 a viz meurs 1922.

† ALSIM GOURAUD,
Eskob Guened.